

Modèle CCYC : ©DNE

Nom de famille (naissance) :


(Suivi s'il y a lieu, du nom d'usage)

Prénom(s) :

N° candidat :  N° d'inscription :

(Les numéros figurent sur la convocation.)

Né(e) le :  /  /

 Liberté • Égalité • Fraternité  
RÉPUBLIQUE FRANÇAISE

1.1

## Évaluation

**CLASSE :** Première

**VOIE :**  Générale  Technologique  Toutes voies (LV)

**ENSEIGNEMENT :** Breton

**DURÉE DE L'ÉPREUVE :** 1h30

Niveaux visés (LV) : LVA **B1-B2** LVB **A2-B1**

Axes de programme : **Axe 1 : « Identités et échanges »**

**CALCULATRICE AUTORISÉE :**  Oui  Non

**DICTIONNAIRE AUTORISÉ :**  Oui  Non

Ce sujet contient des parties à rendre par le candidat avec sa copie. De ce fait, il ne peut être dupliqué et doit être imprimé pour chaque candidat afin d'assurer ensuite sa bonne numérisation.

Ce sujet intègre des éléments en couleur. S'il est choisi par l'équipe pédagogique, il est nécessaire que chaque élève dispose d'une impression en couleur.

Ce sujet contient des pièces jointes de type audio ou vidéo qu'il faudra télécharger et jouer le jour de l'épreuve.

**Nombre total de pages :** 4

**Baccalauréat général et technologique**  
**Langues vivantes régionales - Breton**

**Classe de première**

**Compréhension de l'écrit et expression écrite**  
**(3<sup>e</sup> trimestre)**

<b><u>Niveau visé</u></b> <b>LVB : A2-B1</b>	<b><u>Durée de l'épreuve</u></b> <b>1 h 30</b>	<b><u>Barème 20 points</u></b> CE : 10 points EE : 10 points
---	---	--

L'ensemble du sujet porte sur l'**axe 1** du programme : « **Identités et échanges** »

Il s'organise en deux parties :

- 1- Compréhension de l'écrit**
- 2- Expression écrite**

Vous disposez d'**une heure trente** pour prendre connaissance de l'intégralité du dossier et pour traiter la compréhension de l'écrit (partie 1) et le sujet d'expression écrite (partie 2) **en breton**.

**Tiriadoù<sup>1</sup> bras hag identelezh : ha mont asambles e c'hellont ?**

**Un emgav gant... Anaëlle Le Piolet**

*Kas da benn studioù war diorren an tiriad ne vir ket outi a zerc'hel d'he identelezh.*

**Anaëlle, penaos eo dav kompren un tiriad, hiziv an deiz ?**

Evidon e c'hell ul lec'h bennak bezañ un tiriad a-drugarez d'e annezidi, an dud o chom war an dachenn-se, o vevañ eno, hag a lak ar gumun, pe un tiriad brasoc'h, da vevañ, dre ar c'hevredigezhioù, ar stalioù, ar skolioù... An annezidi eo a ro nerzh d'an tiriad, n'eo ket an embregerezhioù bras ; un tiriad a vev a-drugarez d'an darempredoù etre an dud hag a zo o chom eno.

**Ha cheñchet eo ar mod da welet gant an implij a vez bremañ eus ar rouedad<sup>2</sup> ?**

Marteze... Merzet e vez eo an tiriad brasoc'h-brasañ, dre m'eo aesoc'h da vont e darempred gant un den a zo o chom pell-tre. Met un tiriad a zo termenet ivez gant doareoù an annezidi a zo tomm ouzh o lec'h-bevañ pe get ; pa 'n em sant ket an dud liammet ouzh ul lec'h, dre e identelezh, e istor, hag e yezh a-wechoù, met ivez dre an darempredoù etreze, n'eo ket un tiriad ken.

---

<sup>1</sup> Tiriad : tachenn, bro.

<sup>2</sup> Rouedad : internet.

## **Ha plas a zo c'hoazh evit ur vuhez ha ne vefe ket kreizennet ?**

Ya, spi am eus ez eus c'hoazh plas evit ur vuhez war ar maez, ha n'eo ket en ur gêr vras-sponthus. Forzh penaos e vo ezhomm eus tud ha n'int ket o chom en ur gêr-kreiz, na pa vez ken evit produiñ boued a galite. Ne vo ket graet se gant ar re a labour e skraberioù-oabl<sup>3</sup>, war o urzhiataer ! Met gwir eo, ledanoc'h-ledanañ eo ar c'hêrioù, gant banlevioù o vrasaat. Koulskoude, evidon, eo an dud hag a zo o vont d'en em ziblasañ muioc'h war ar maez, met hep mont re bell eus ar c'hêrioù, gant ar pal da virout o c'halite bevañ... 'Pezh a bado evit ur prantad !

## **Plas a zo c'hoazh evit un identelezh da vare ma vez gwelet ar c'humuniou oc'h en em unaniñ, dezho un anv nevez ?**

D'am soñj, un identelezh n'eo ket un dra a c'hell bezañ diverket pe disoñjet. Harzoù un identelezh n'int ket liammet kement-se gant takad ur gumun pe ur vro. Dont a ran eus Bro-Dreger, ha n'eo ket un tiriad anavezet gant ar stad, met n'eo ket evit an abeg-mañ n'em eus ket ul liamm kreñv gant ar c'horn-bro-mañ. Evidon, an identelezh n'eo ket ur santimant hep muiken, hag a nac'h an identelezhioù all. Ur sammad eo. Dont a ran eus Bro-Dreger, en Aodoù-an-Arvor, met ur plac'h eus Brest on ivez hiziv, un tammig d'an nebeutañ, ha Breizhadez on ivez... Da lavaret eo, krouet e vez hon identelezh a-hed ar vuhez, gant an darempredoù, ha n'int ket staget ouzh an harzoù ofisiel.

## **Pehini eo ar gentel bouezusañ da reiñ d'ar vugale yaouank, hiziv an deiz ?**

Pouezus-tre eo kelenn dezho chom hep disoñjal piv omp, hon identelezh, hon istor, ha tout-se, met hep nac'hañ hini ar re all, evel ma vez graet re alies gant tud 'zo... D'am soñj eo gwelloc'h, ha bravoc'h, bevañ asambles, en ur zegemer mat al liesseurted sevenadurel, yezhel, istorel ha me oar me ! Bez' e c'heller deskiñ kement a draoù en ur eskemm gant an dud !

Diwar ar pennad « Un emgav gant... Anaëlle Le Piolet », *Ya !*, niv. 694, 28/08/2018.

## **1. Compréhension de l'écrit (10 points)**

Respontit e brezhoneg d'ar goulennoù amañ war-lerc'h :

- Petra eo un tiriad hervezh Anaëlle Le Piolet ? Penaos eo liammet ouzh an dud a zo o chom ennañ ?
- Displegit ar frazenn-mañ : « Krouet e vez hon identelezh a-hed ar vuhez, gant an darempredoù, ha n'int ket staget ouzh an harzoù ofisiel ».
- Penaos e c'hell ar pennad-mañ bezañ liammet ouzh an danvez-studi « An identelezhioù hag an eskemmoù » ?

---

<sup>3</sup> Skraber-oabl : savadur uhel-uhel.

## 2. Expression écrite (10 points)

Respontit e brezhoneg da unan eus an daou c'houlenn amañ war-lerc'h.

Savit ur pennad-skrid a 120 ger d'an nebeutañ.

### Goulenn A

Eus ur vro pe ur rannvro all e teu ur mignon/ur vignonez dit. Eskemm a rit war ho identelezh : peseurt sell ho peus warni ? Penaos e vevit anezhi ? Petra a zo heñvel pe disheñvel ? Savit an diviz.

### Goulenn B

« Harzoù un identelezh n'int ket liammet kement-se gant takad ur gumun pe ur vro » eme Anaëlle Le Piolet. Petra a soñjit eus an dra-mañ ?